

(298)

Detaill

Ha cironstançon remercabl
 Var ay impar campagn a dri mis eus a Napoleon - Vras,
 Impalaer a Franç, pehini a deu dra brocwi demp
 eur Peoc'h mad, padus hac enorus.
 Laget en brezonec gant F^r. Guenveur, habitant eus a
 Sant-Doming, breman en Montroulez.
 (Genta c'hoeror 1806.)

Var ton: Pa deuan da zonzal en amzer dremenet.

Deut e Napoleon hep drouc eus an arme,
 En e zorn eur balmes, curunet a lore,
 Goude bea foreet temp roue da blega,
 Ha procuret d'ar Franç eur peoc'h eus ar c'haera.

Mestr absolu ar mör, ar Zoz, cruel, traitour,
 A Franç en peb amzer ar marvel adversour;
 Eus e gloar da zonet avius cosunnaret,
 Enep e Impalaer a voa dichadenmet.

(299)

Gant aour ha finesse, èruet: voa c'hoas
 Da zigas soudarded a enep ar bobl vras;
 Eus a bëvar-c'hant lëo e teuas armeou
 Da receo eus o dorn ar vez hac ar maro.

Pa glëo Napoleon e voant dija en hent
 Entrezec hac hor brö, var bini e qerzent,
 Heuliet gant curunou, evel eul luheden
 E parti a Baris evit o diarben.

En penn e arme vras en deus buan roet
 D' hon oll adversourien eur merc a c'halloudet:
 En daou vis a amzer, Napoleon en deus grët
 Muioc'h equet biscoas en deg vloas voe gïelet.

Er pennad amzer-ze, deän en deus sujet

270

Impalaendet Autrich (hoc ar Mestr dillojet);
Eul loden eus Bohem, calz eus ar Moravi,
Hac a volonte vad rouantelez Hongri.

C'hoas en deus gemeret an Tyrol, ar Stiry,
Ar Stajou a Venis ha proving Carinthi;
Gant an Istri; en oll trivac'h milion den
Coüet en e bouvoar, carzi en eur dremen.

Devez a vemor vad, unnecvet a Frimer (1),
Ma voe Napoleon curunet Impalaer!
Dirac Kær Austerlitz, an deiz-se er penn-bloa,
En devoe eur boqet eus ar agreapla.

(300)

An deiz aroc, pa voa dre 'n arme o pourmen,
E sorti eus e renc eur zoudard ancien:
« Napoleon, emean, chom pell eus an toliou;
» Varc'hoas ni royo did eur boqet banielou.»

— Ma! eme 'n Impalaer, ne dostain qet d'an tãn,
Mar deut, evel custum, d'o denc'hel en dindan:
Mes mar deut da blegja, ractal hoc'h Impaler
A bartezjo ganec'h ar gloar hac an danjer.

Eus a gant mil soudard Autri-Russianet,
Daou-uguent mil a voe gant hon tud gemeret,
Gant ugent General ha daou-ugent quiton,
D'oll magazinou ha c'hoec'h-uguent canon.

Deiz varlerc'h ar gombat e teu eun officer
Da gaout Napoleon abers e Impaler:
« Harros bras, emean, paouezet, paouezet...
Va mestr hac e gonsort oc'h eus dialanet.»

Hit, eme Napoleon, ha deÿe leveret
E meus a galon vad o goulen accordet;
Dre o c'homportamant int o-unan zo cos
D'ar goad a zo scuillet abalamour d'ar Toz.

(301)

Impalaer an Autrich, prestic goude 'n dra-man,

(1). — Mis gerze.

Da gasut Napoleon en em rent e-unan,
D'en assuri e voa, couz hac e gamarad,
Contantet evit pell en direa combat.

Tostait, ò va breur! eme 'n den talvoudec;
Fachet oun d'ho receo amañ en eur blouzez;
Mes va-unan ne meus abaoe deg devez
Nemet [eul] lojeis plous evit ty ha pales.

Frances-Daou a respont: ho palez zo impar:
Ne zeus n'icun er bed leun a guement a c'hloar.
Va drouc a veritàn. Gout a dlejen dija
E voac'h brassa haros a zo en Europa.

Sir, eus ho calon vras e meus anaoudequez,
Abalamour da ze e c'houlennàn hepr mez
Antren en conferanç evit digas ar peoc'h:
Va oll dalvoudequez a zepant diouzoc'h.

(302) C'hoas e credan mennat digant ho Majestez,
Dre vrasder ho calon eur merc a vadelez:
Alexandr a c'houlen gant ar rest e arme
Da retorn var e c'his diganec'h liberte.

Mes, eme Napoleon, Mestr ar Russianet
Gant ar rest eus e dud a zo ganen cernet.
Gouscoude hit da gasut General Savary;
Me bermet e retorn gant e drein d'ar Russi.

Alexandr fa velas ar merc-se a voder,
Dre bini ec'h otten gallout retorn d'ar quèr,
A c'houlennas petra a roje da voarand:
Netra! voe respontet, nemet quer Alexand.

„ Mes dre 'n hent ma teujoc'h c'houi a retorno prest,
„ Pe otramant souden ni goeo var ho rest. »
Goloet gant ar vez, Alexandr a ya qu'it,
O rei cant mil mallos da Londres ha da Bitt (1).

(1). - Ministr Soz, pehini en deus grèt d'ar Franç ar muia a zrouc en deus ellet.

272

Cete penos e voe fin d'ar c'hampagn eurus
Pini a broeur d'emp eur peoc'h mad ha padus,
Rac an tri Roue all, gant Napoleon croüet,
Da zifen cos ar Franç a voa interesset.

Neuze Napoleon a lavar d'e arme :

« M'ho cortoz en Paris ar c'henta eus mis mae ;
» Eno , va bugale , en gichen va fales,
» E recevat mercou demeus va c'harantez .

(303)

» Abars an amzer -ze c'houi vezo disquizez
» Eus an oll fatigou pere oc'h eus souffret,
» Evit ellout monet , ma na ve libr ar mör,
» El lec'h ma vo requis , var barzjou an enor .»

Penos ellout cassat ar revolution ?

Dleourien ez omp dei eus a Napoleon !

Var an drouc e deus gret serromp hon daoulagad ;
Men a zo deus ar re he deus scrivellet mad .

Napoleon a voar , quelloc'h equet nicun ,
Huellat evidomp al lufr eus ar gurun :
Breman d'an amzer gos , ah ! pebes differanç !
Dindan e vrec'h vaillant peguer puissant eo Franç !

Memes speret dre oll en e impalaerdet ;
Memes santimantchou , carantez ha respet
En eur vasc evitan , gant eur transport a joa ,
Er c'haerion , var [ar] mæs , dre oll er memes tra .

Den muioc'h equetan , a dra zur , Bretonet,
Ne veritas biscoas bea gement caret .
Eur pris hepen a zo dign eus e zourciou ,
Ma teuyo d'e gavet en hoc'h oll galonou .

(304)

Men a greiz va hini an detaiil - man a ris
Evit sclerijenna va mignonet brois ,
Var oberiou per caer , per surprenus ha güir ;
Mes conta deze oll , allas ! a ve re hir .

Tadou , ha c'houi , Mamou , oc'h eus souffret diouer ,

Souden e vrietot Mibien vaillant ha qer .
 Ha c'houi, merc'het yauanc, preparit boqejou
 Erit ar re a dle bea d'c'h priejou .

Dre an nebeut a gouplejou - man e veler en quironnez an darnutua
 eus ar peñ a zo bet êruet a gaer, a guichen ma partias an Impalaer
 d'an arme, bete fin ar c'hampagn dibarack eus ~~de~~ dri mis, êchuet
 en eur feçon qen enorus ha qen talvoudec evidomp, ignoret gant calz a
 dud, ha gant pere e vijent marteze ignoret erit atao .

(Vol. VII, p. 298-304.)
 les strophes ne sont pas numérotées .